

KANTIK SANT VIO

E. PARREZ TREGUENNEC.



Dalc'hit d'ho feiz, tud Breiz-Izel,
Seul-vui ma roer dezhi brezeñ
O klask diganeoc'h he lemel!

I

Doue en env a zo meulet
Gant an oll Zen ha Sentezet,
Meulet eo gant an holl Aelet.

2

Ra vo meulet var an douar,
Gant mouez kement hini her c'har
Hag e pep leac'h, hag e pep mar.

3

Ra vo meulet Doue e Breiz
Da veza roët decmp ar feiz
Hag he c'hendalc'het en hor c'hreiz.

4

Goude ive ra viot meulet
Otrou sant Vio benniget
En hor bro-ni kement karet.

5

Guechall, sant bras, en ho pue
C'houi oa souten ar vugale
Dre ho peden ha gras Doue.

6

Otrou sant Vio, vel guechall,
Hirio ive c'houi ho diaouall,
Eus e bep drouk, eus e bep goall.

7

D'ho feunteun leun a vurzudou
A bep tu 'zired ar mamou
Da ginnik ho bugaligoù.

8

Yec'het c'houlennont evithe
Evit ar c'horf hag an ene,
Ma chomint fidel da Zoue.

10

Ennoc'h pep labourer douar
A lak e fizians, c'houi er goar,
Rag ho kalloud a zo dispar.

II

Ma jom e dachen skarnilet
Oabl glaz an nenv diglizennet,
D'ho kaout, Sant Vio, e tired.

12

Dre ho peden, var e Arvor,
Doue a zigas eus, ar mor,
Ar glao klouar zo e denor.

13

Ha da skuil dour aploc'h e benn,
Ma kendalc'h re bell ar goabren,
Dreizoc'h c'hoaz e kas e c'houlenn.

14

En danjerioù var ar mor don,
Ar pesketour a greis kalon
A c'houlenn ho proteksion.

16

En deiz en env en ho kichen,
Mar domp saivet dre ho peden,
Pegen kaer vo, hor c'hurunen.